



CHANSON NEVEZ

COMPOSET

D'AR GOARSET YAOUANG

CANTON LANNEUR.

Var eun ton *Gallec*.

Me ho suppli Gouerc'hez glorius Vari, hac e Mab beniguet,
Diganeoc'h e c'houlennan sclerijen d'am speret,
Ma c'helfet rei d'in ar pouvoer hag ive arbuissañ.
Evel m'en devoa sant Louis pa voa roue er Franc.

E mije implijet va amzer da zonet da rima,
Sclerijen d'am daoulagad ma teuin da scriva,
Selaouit a galon sperejou a zo parfet,
Entrezoc'h tud yaouank ne vefet ket dalet.

Me ho suppli bretounet prestit oc'h intantion
Da glevet cana eur c'hiniad truezus a doucho ho calon,
Eur c'hiniad leun a c'hlac'har, deus an truezussa,
Zo composit a nevez evit ar bloa-ma.

Deus a beurs hor mestrou zeo deut ar gomandant
Da denna d'ar billet evit ar bloavez present,
Bars er bloa mil eis kant a tri-uguent
D'ar seitec a viz c'hovevrer, 'vit rei dec'h da entent.

Var dro creiste anter pe eun heur d'ann hirra,
Voa sonet ann tabourin dezo d'eu em rentañ,
En em renta a ra ar botret yaouank e Lanneur prohtamant,
Pa renkont accomplissa dessin ar gouarnamant.

D'ar seitec a viz c'hovevrer a zo tremenet,
Ar botret yaouank a deus tennet ar billet.
Kuitaad a renkont a mont er mez ar vro.
Ha! Doue ho c'hunduo e lec'h ma zeziro.

Tud yaouank deus ann arme deus ar re derrupia,
Glac'haret eo ho ligne p'ho guelont ho partia,
Da bartial er mes ho brô da vont gant ann nation,
E man beuzet a zaclou ho zud gant ann desolation.

Kri vije ar galon da vouela ma na deuje
E bars en canton Lanneur breman neb na vije
O velet ann dud yaouank, ho ligne beuzet a c'hlac'har,
Ann daclou en ho daoulagad ho c'hlebia ann douar.

174

H02 B

Pa voant bet galvet 'vit donnet da denna
E commanças ho holl izili da zonet da grena,
Kemense voa eur scouër e rankjent monet d'ann arme,
Skuilla 'ra daëlou ho zaoulagad ha ne reont ket heb sujet.

Me a zisclerio deoc'h belec fin ar breuven
Ar c'hlac'har a zo breman e touesk ar Francijen
Voar ar sujet demeus ar revolution,
E rankont kuitaad da vont gant ann nation.

Ann dud ancienna a zo voar ar bed man
N'ho deus ket gouelet biscoas ar pez a zo breman
E rankat ar voasset gard mobiliset kuitaad ho bro;
Me a gred e vezo mantred holl quement a glevo.

Kri vije ar galon ma na deu da voela,
O clevet aneze d'eus en em guiniada,
Ar gard mobiliset leun eus a velanconi
Pa c'heont d'eus ar Prussianet da gombati.

Ann amzer evurusamant a ya da vea tremenet,
Va c'halon zo languissant pa c'heomp-ni da veza separet,
Amzer ha laouenediguez a rankomp eta dilezel,
Breman e zomp leun a dristidiguez ho kuitaad Breiz-Izel.

Deut eo ar Prussianet voar douar ar Franchizen,
Ha ni a guita hor brô gant glac'har hag anken,
Goude lakaad n'omp flaç d'ober zervich ar gouarnamant
E renkomp ho tilezel ha mont var lerc'h hon arc'hant.

Ho zud hag ho ligne zo commancet da vouela
Ho clevet aneze deus en em guiniada,
Ho prononç ar guir e rankjent en em guitaad,
Ho ! kement ho c'hevo o devezo calonad.

Tadou ha mamou hag ho ligne zo desolet,
Breudeur ha c'hoarezet zo glac'haret,
Hag hon c'halonou enn hon c'hreis a zo cazi rannet
Pa rankomp kuitaad ar re ho d'eus hon maguet.

Quenavo tadou ha mamou pa rankomp kuitaad,
Hag hor breudeur ha c'hoarezet tener ha mad,
Kerent hag anaoudeguezec, gant eur galon glac'haret,
Pa rankomp kuitaad 'vit mont d'ar Prussianet.

Tadou ha mamou ha lavar d'ho bugale :
« Deut c'hoas d'omp ambrassi kent ma c'heet d'ann arme,
Deut c'hoas entre hon divrec'h eur vech kent eguet mervel,
« Ni m'omp ken ann avantach pa rankomp ho tilezel. »

Mont a reont ann eil hag eguile 'vit ar vech diveza,
Ann daëlou enn ho daoulagad a deu da izilla
Ann daëlou a deu da izilla deus ho daoulagad,
Ha kement a glevje 'nije glac'har ha calonad.

Ho zadou dezolet a lavar en em vouela :
« Aotrou Doue va bugale guez breman renkomp partia,
Breman zeo ret hon abandonni ha mont deus ar guer,
Ne chomfet ket ganemp d'hor soulaji enn hon mizer.

Hor c'halonou 'zo fraillet dre nerz ho huanadennou,
Hag hon daoulagad 'zo beuzet enn eur môr a zaëlou,
Allas ! deut eo ann devez ma renket hor c'huilaad,
Ha kement ho cleo aman devo sur calonad.

Ma ne deuet ket da velet ar gard mobilizet
Ni a gred e soc'h cruelloc'h eguet ann tyrantel,
Pere goueac'h en devoa bet ar grueldet
Da lakat d'ar maro hor Zalver biniguet.

« Ret eo eta kerent ha mignonet en eur separi,
Pa ne m'eump ket ar bonheur d'ho souten en ho cosni,
Al lezen 'zo didruez a deut eo ann ordrenanc
Ma renkomp ho kuitaad hag heuil trouplou Franç.

Kenavo holl berejou ha douarou beniguet
Enn pelec'h e moamp design da veza interes;
Da vouël ann Anaon clemus ne deomp mui var ho peyou
Da scuilla ann dour beniguet gant cals a ganvou.

Kerent hag anaoudeguez hon design a zo bras.
Ni garfe beza decedet breman en ho plaç,
Kercouls men font badiziant, garnel hon zud coz,
Graç deomp d'en em velet en gloar ar Barados. »

Ha daëlou ho daoulagad a c'hibien ar vein be
Kals a dud eus ho guelet gant glac'har a vouele
O velet ar gard mobilizet ec'h ober ho c'hiniad,
A marteze en reont, allas siouas ! evit mad.

« Kenavo beleyen ho c'heus hon badeet, hac ann oll dud a ilis,
Ar mër hac an adjoint memprou deus an dud a justie,
Ha d'ann dud ancien, a dec'h tout kement ho m'emp karet,
Ha da ganton Lanneur ha d'e holl habitant.

Pa zeo deut al lezen deus a beurs ministr ar brezel,
E rankomp ho kuitaad pa voar deut d'hor c'hervel,
Da vonet d'ho zifen eus ann holl euemiet
Ho d'eus c'hoant da exerci varnomp ho c'hrueldet. »

« Tevel, tevel va breudeur ha na vouelit ket,
Tachit d'en em gonsoli, en eur gonformi 'zo ret.
Entrezoc'h gærsset yaouank bevet en esperanc
Doue tad a visericord a zo bras e brovidanc.

Coude ma vo fin d'ar brezel ha gounezet ar victoar
Gant graç Doue hag ar Verc'hez 'vo fin d'hor c'hlac'har,
Gant merk d'eus ho vaillantis, gant cals eus a enoriou,
E teufet d'ar gueur 'vit sec'ha pis hon daëlou.

Me ne espèrni ket va foan en deyou da sonet
Da unissa ann oferennou evidoc'h soudardet,
'Vit ma pec'h chanc'h ha bonheur da return var ho kis,
Gant eun drapo loreet gant merk ar vaillantis. »

Cetu ar gard mobiliset consolet a gomsou charmant,
Hac a lavar an eil d'eguile gant eur galon contant :
» Entreomp breudeur yaouank d'emp contant d'an arme
Da sicour kerent ha mignonet zo en danjer ho bue.

Me ho suppli tadou ha mamou kent ho kuitaad,
Ha breudeur ha c'hoarezet tener ha mad,
Kaout sonj da bedi Doue hac ar Verc'hez evidomp,
Hac hon Æles mad en devo sonj ac'hanomp.

Breudeur ha c'hoarezet pa chomet gante er vro,
Bezet soign eus hon zud betec heur ar maro,
Meur a veach ganeomp ho deus bet veillet,
Ha daëlou o daoulagad a deus glebiet ann oalet.

Breman pa zomp memprou da Jesus, soudarde an Aviel,
Bugale da Zoue hon Tad, memprou d'ar Speret-Santel,
Entrezomp breudeur ha kerent deomp gant enor ha respet,
Deomp d'ann Ilis a Guernitron gant eur galon barfet. »

Enn Ilis Kernitron en em prosternchont d'ann daoulin
Dirac ar Verc'hez gloriüs Vari hac e Mab divin.
Juntret gante ho daouarn, digor ho daoulagad
Ho sellet trezek ann Env da c'houlenn ar mennad.

« Guir vab d'ann Tad Eternel, hor Salver adorabl,
N'hi deu d'och adori betec o Tabernacl,
Diskennet mar plich ganeoc'h varnomp eur sel a drue
Vit ma meomp chanch a bonheur da zistrei d'eus ann arme.

Drindet santel prosternet dirazoc'h d'ann daoulin,
Me o supli da rei sicour d'ho servicherrien indign,
Va speret 'zo fragil ha va studi zo izel,
Sclerijen a c'houlennan ouzoc'h Drindet santel.

Guerc'hez gloriüs Vari, deoc'h en em adressa,
Obtenit deomp ar graçou da c'hallout resista,
Deomp ha d'hon breudeur pa vefomp er gombat,
Vit ma vefomp preservet deus ann tñ hac ar goad.

Diouzoc'h Sænt ha Sæntezet ne guiniad eomp kel,
Esperañç e meomp e vefet d'emp guir alvocadet,
Deomp ha d'hon breudeur pa vefomp er broyou estranjour,
Prestit deomp, me o supli, prestit deomp ho sicour.

Evit ma vefomp ann tambour-major, e ganen gantan en ear
O crial var ar soudardet vaillant : « Kit breman d'ar gueur,
Neuse e tistrofomp d'ar gueur gant cals a joaustet,
Kerent ha mignonet ve 'zo tout ravisset. »

Reketomp eta da guement 'zo decedet,
E c'hafent da repos en gloar ann evurustet,
Graç deomp d'en em velet er pales celestiel,
Enn ano ann Tad, ar Mab hac ar Speret santel.

Entrezoc'h azistantet ho p'eus c'hoant da glevet
Piou n'eus chanson ar c'hiniad-man composit,
Eur paysant yaouank, guinidic a baros Locquirec,
E hano Guillaume MERER, 'zo dister a speret.



175

Bugale Breiz-Izell

War don gallek ar *Marscillaise*.

Redomp bugalé Breiz-Izell,
 Redomp buhan oll ha vagad,
 Ia, redomp hirio d'ar vrezell,
 Ne glevit ket trouz aon argad, *(bis)*
 Ann devez a zo n'eur gaved
 Ma zeu c'hoaz honn euebourien,
 Ag inn stankoc'h evit merrien,
 N'eur iouall goaleur d'hor c'haved.

Kemeromp ann armou
 A zouge hor zadou,
 D'ha vonn *(bis)*
 Holl varneze
 Eb kaout aon bugale.

O pebeuz devez eo eman !
 Honn euebourien ha dosta,
 Evel-ze bugale breman
 Skoomp war n'he eb marc'hata, *(bis)*
 Hirio tennomp holl hor c'heze
 Hor breudeur zo deuz hor guervel,
 Holl he meinn ho vonn d'ha vervel,
 Ho vonn d'ha vervel, marteze !

Kemeromp ann armou
 A zouge hor zadou,
 D'ha vonn *(bis)*
 Holl warneze
 Eb kaout aon bugale.

Honn enebourien miliguet
Enn ho c'halon tann ann Ivern,
Ha zeu warnomp kenn kounnaret
Ag ar marc'h paour ha zac'h err spern. (bis)
A war zu aman pa zeuont,
Enn eur laza bihan ha braz,
Greomp deze kavet ho c'hlaez,
Pe dec'hell kuid kargued ha spont.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Hoguen, arabat ezeo skei
Nemet ha rhe hara demp poan,
Ne lazomp kenn nemet ar blei
Rak hennez eo ankou ann oan. (bis)
Hennez gleomp dizalbenna,
Evidomp ezeo eb truez,
Evel-ze tro pad hor buez
Lakomp anezhan d'ha grena.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Hor baniel, bugale Arvor,
Ha gleomp atao d'ha zougwen,
Hi ezeo baniel ann henor,
Sellit, evel ann erc'h eo gwen. (bis)
Ha be vech ma ve displegved
Ann enebourien ha veler
Vel bleun, pa zeu ar goal amezher,
Ho plega ho feunou mantred.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Enn keita ma vomp enn buez
Hor diskaromp eb kavet aon,
Arabat eo kavet truez,
Ho hastennomp war ar valskaon. (bis)
Sellit Kounann Meriadek,
A zao hirio demuez he ve
Enn eur lavarad demp ive :
— « Dallit va c'hlese galloudek ! »

Kemeromp an armou
A zouge ho zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Demeuz he ve a zao Guesklen,
A war he gleze ha lenner :
— « Henor d'ha Vreiz, ha tor he benn
» D'ha c'henebour, guir marc'henner! » (bis)
Ag enn eur zavel ha lavar :
« Redit, redit d'ar vrezel holl,
« A diskarit ann dud diroll
« A c'houzant, gant poan, ann douar! »

Kemeromp an armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Klevit tud Breiz, Marzin, Arzur,
Daou zen demeuz ann amzer all,
Ho lavarad de-oc'h adrazur :
— « Tennit, tennit ar griou falh » (bis)
Ia, ho zennit he-ta buhan,
Araog ma zenio ann devez
Ma renkfoch' h anzaou eun divez
Evit atao bras ha bihan.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Guelit ann envou zo tannet,
Ar labousser chom eb kana,
Ag enn douriou zao ar rannet,
Ne reont ken nemet krena. (bis)
Allaz ! holl grenonn eb paouez,
Guelit, ho fennou ha blegont,
Keita ma zo tud divergont
Ho klask atao mouga hor mouez.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Klevit, klevit ar c'hanollion,
Ne reont ken nemet strakall,
Keita ma c'halv ann drompillion,
Deuz ann daou du, d'ar gann, re-all. (bis)
Evel-ze diskuelomp deze
Ezomp-ni bugale d'ha Vreiz,
Ar vro elec'h ma gaver feiz,
Douzanc Doue ha karante.

Kemeromp ann armou
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Diskuelomp garromp hor frankiz,
Ha kement tra ra vad ann den,
Pa vomp, tud koz ha iaouankiz,
Enn eur ganna war ar blenen. (bis)
Rak inn mar galsenn ho lakad
D'ha gouskad enn ho liammou.
Bugale, tadou ha mammou,
Ha chomfemp enn he d'ha gouskad.

Kemeromp ann armoù
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

Ia, diskuelomp ouzomp mervel,
Evit difenn atao hor bro,
Hor bro goz anvet Breiz-Izell,
Breiz-Izell, douar ann dero. (bis)
Evel-ze anezi karromp
Enn keita ma vomp enn buez,
Hi, zo eur vam leun ha druez
Ag evit-hi nimp holl marvomp!

Kemeromp ann armoù
A zouge hor zadou,
D'ha vonn (bis)
Holl warneze
Eb kaout aon bugale.

